

Ar VUHEZ

KRISTEN

Kelaouenn ar familhou kristen

a zeu eur wech ar miz



TAOLENN	SOMMAIRE
Dallentez 409	Pour sanctifier le mois de Septembre 421
Gouel Hanter-Eost..... 410	L'esprit paroissial..... 422
Pa oan krennard..... 411	Ça et là..... 423
An eured kaer..... 413	Nouvelles des Missions.. 427
Dublin ha Santez-Anna.. 415	Le Tiers et le travail.... 431
Kenteliou an Aviel..... 417	

RÉDACTION & ADMINISTRATION

Monsieur le Directeur de *Ar Vuhez Kristen*

28, Avenue de la Marne, LORIENT — C/c. 209.81, Nantes.

“Ar Vuhez Kristen”

kelaouenn ar Familhou kristen,

- A zeu er-maez e fin ar miz.
- A zo atao aes da lenn ha da gompren.
- A zo enni skeudennou kaer ha niverus.
- A zo marc'had-mat.

Koumanant ordinal :

6 l. ar bloaz.

Koumanant a enor :

10 l. ar bloaz, gant perz E 365 OFERENN (UNAN BEMDEZ) a vez lavaret bep bloaz evit hor madoberourien. — Hol lennerien, m'o deus c'hoant, a c'hell dreizo o-unan rei d'o zud varo frouez an oferennoù-se.

Koumananti a c'heller e pep amzer eus ar bloaz ; ar c'houmananchou koulskoude ne gomansont nemet d'ar 1 a viz Genver, d'ar 1 a viz Mae pe d'ar 1 a viz Gwengolo. — Evit chanj adress, digas d'eomp pevar real e timbrjou. — Ma ne resever ket ar gelaouenn, goude beza he faeet, skriva d'eomp raktal.

“Ar Vuhez Kristen”

eo kalaouenn ar Familhou kristen.

LENNIT ETA ANEZI,

ha skignit anezi en-dro d'eoc'h

HE FLAS A ZO

e kement ti kristen a zo en hor bro

Skriva da : M. le Directeur de : « Ar Vuhez Kristen »,
28, avenue de la Marne, Lorient, Morbihan.

C.-C. 209-81, Nantes.



DALLENTEZ !

Distera klenved a daper, emeur raktal o klemm, o nec'hi ; evit koueza er pec'hed marvel ne reer van ebet ! Preder a zo gant eur c'horf a bec'hed hag a varo, n'eus nec'hamant ebet gant an ene, skeudenn veo an Aotrou Doue, spered ha na dle ket mervel.

Dallentez ! Diskiant an den a gemer muioc'h a soursi gant e zilhad eget gant e gorf ! ha nag a hini a sonj muioc'h en o gwiskamant, en o douarou, en o loëned, eget na reont en o ene ?

Pegeit 'ta e chomoc'h c'hoaz en dallentez hag er pec'hed ? Perak 'ta en em stagit kement ouz traou goullou ha didalvez ? Ha goude ma kavfec'h eun eürusted gwirion o tanva holl blijaduriou ar bed, petra vezoc'h gwelloc'h, ma vez ret d'eoc'h koueza goude en ifern evit atao ? Ar re a zo breman e tan an ifern, peseurt frealzidigez eo evito sonjal int bet eürus war an douar ? Poan eo a ra d'ezo ar sonj-se, ha netra ken !

Lakit doun en ho spered komz H. S. Jezuz-Krist : « Petra dalv d'an den gounit ar bed holl, ma teu da goll e ene. » « Rak, eme c'hoaz Sant Eucher, ne c'heller ket lavarout e c'hounezet eun dra bennak, pa goller an ene, pegwir koll an ene, a zo koll pep tra. »





Gouel Hanter-Eost

*Piou eo kounnez a bign en he mantell a c'hloar,
Kaer da welet evel al loar,
Skedusoc'h kalz eget ne d'eo*

Heol mousc'hoarzus an hanv holl alaouret e vleo ?

Ar Werc'hez eo hounnez, hounnez eo Mamm Doue,

He Mab, en Nenv, a zo Roue,

Ha, diouz e berz, rez an oabl flamm,

An Aelez a ziskenn da ziambroug e Vamm.

E kelc'h en-dro d'ezi int niverus-meurbet,

Ne vank aze hini ebet ;

Ha ken laouen eo ho sellou,

Ma dav o c'haniri war beg o muzellou.

O Rouanez d'o heul uhel en êr a sao,

War-du ar baradoz ken brao ;

Hag, en dudi, betek he zron,

Gant dorn he Mab Jezuz eo blieniet hon Itron.

O Mari, o Mari, en harlu emoun c'hoaz,

Pegoulz e c'houlaoou warc'hoaz ?

Peur e c'hellin ivez, d'am zro,

Gant armeou an Aelez, ho meuli em gwir Vro ?

J. L'HELGOUAC'H. O.M.I.

Sant-Brieg, 16-8-32.



Pa oan krennard...

Eur bleo-gwenn bennak o tont adarre da veuli an amzer goz !... Nann, lennerien ger. A-walc'h eo d'in kemer da dest an neb en deus hanter-kant vloaz echu, hag hen am dislaro, ma n'eo ket gwir.

Pa oan krennard, ne vije klevet ger gallek ebet nag en ti, nag er park, nag en ostaleri, nag en iliz.

Pa oan krennard, aon ebet na vije biken mouget ar brezoneg.

Pa oan krennard, an holl vugale a zeske ar c'hatekiz brezonek, hag al lodenn vrasa anezo her gouie goulenn ha respont.

Pa oan krennard, ne glaske ket ar mammou chaokat briz-galleg gant o bugaligou.

Pa oan krennard, ne dremene den ebet eus an ti hep lavarout e bedennou mintin ha noz. hag e-kerz ar goanv da vihana, en em vode an holl d'ober pedennou an noz.

Pa oan krennard, den yac'h ebet ne vanke da vont d'an oferenn da sul ; kaeroc'h c'hoaz, nemet eul lezireg bennak, ar re a yae d'an oferenn-bred, a yae ivez d'ar gousperou.

Pa oan krennard, an holl gristenien a dostae ouz o sakramanchou teir pe beder gwech er bloaz.

Pa oan krennard, den ebet n'en dije tremenet eur c'halvar hep lemel e dog hag ober sin ar groaz.

Pa oan krennard, e vije lennet bep noz Buhez ar Sent. Kavet e vije, koulz lavaret e pep ti, Imitasion Jezuz-Krist, gwerziou fur ha Buhez Pevar Mab Hemon. Nag a wech am eus klevet kana Diviz an Doktor hag ar Bugel fur, gwerz ar Brezel 1870, gwerz ar Basion :

« Me a glev trouz an tachou bras
O staga Jezuz war ar Groaz. »

Pa oan krennard, ne vije o tougen tog nemet eul libou-denn bennak bet e Jersey pe e Pariz, c'hoant d'ezi da veza sellet evel eun demezell kêr.

Pa oan krennard, ar baotred hag ar merc'hed yaouank a gemere ivez o flijadur, met neket e dansou mezus ; ne oa ket d'an amzer-se galomperien na galomperezed noz.

Pa oan krennard, n'en dije kredet den ebet kana soniou lous, ha morse ne vije lennet romanchou hag a ra d'ar galon heugi.

Pa oan krennard, ne oa ket saliou-dans d'ober d'ar yaouankiziu koll o furnez.

Pa oan krennard, ne vije roet d'ar yaouankiziu na 10 lur, na 20 lur na 50 lur da dremen ar sul.

Pa oan krennard, e vije eürus an tad hag ar vamm o tege-mer an aeledigou a blije gant Doue degas d'ezo. Daoust d'an ti da veza bihan ha striz, e vije atao plas d'eur bagad bugale. N'em eus klevet na gwelet biskoaz e vije bet marvet bugel paour ebet gant an naon.

Pa oan krennard, e vije eürus ar gerent o rei d'an Aotrou Doue unan eus o bugale evel beleg, misioner, Frer pe leanez. Ne vije digoret dor an ti na da baperou lous na da gazetennou difeiz. Ne zeue e spered den ebet debri kig d'an deiziou difennet.

D'an amzer-se, breman 'zo hanter-kant vloaz, o burzud ! ar vistri hag ar mestrezed-skol « laïk » a yae d'an oferenn kenkoulz hag ar gristenien all.

Pa oan krennard..., gellout a rafen hiraat al listenn !!

— « Neuze eta, hervez ho komz, pa oac'h krennard, ne oa nemet sent en hor bro ? » — Ne lavaran ket kement-se. An ourgouilh, an avaristed, ar blijadur direiz a zo a-viskoaz. Met evit mirout ouz an techou fall hag ar plegou milliget da gaout an trec'h, e oa dirazo eur voger krenvoc'h eget an dir, da lavarout eo : ar feiz, an devosion d'ar Werc'hez Vari, komzou ar beleg, skoueriou hag aliou fur an tad tag ar vamm.

Bezomp eus hon amzer, ya. Met na zilezomp a briz ebet ar pez a oa mat gwechall.

Paotr Traon-ar-C'hoad.



AN EURED KAER

An iliz a oa leun-tenn ; ne oa mui plas goullo ebet. Mab ar maer a oa o timezi gant merc'h tenzorier an iliz ; kerent o doa e pep korn eus ar barrez, hag ar re holl a oa bet pedet, a oa diredet d'an iliz. Mankout eun hevelep eured, biken ! Pell a oa, ne oa ket bet er barrez eur gouel ken kaer.

Mab ar maer a oa eun den yaouank eus an dibab, dire-bech e pep tra. Ar plac'h-nevez a oa ivez brudet dre ar barrez. Gwisket he doa dilhad hervez giz ar barrez, hag e oa koant meurbet da welet. Pa dreuzas an iliz evit dont dirak an aoter, an holl a droe e zaoulagad da sellet etrezek enni.

Ar beleg a vennigas an eured, a reas eur brezegenn gaer. Goude beza meulet, evel m'oa dleet, familhou an daou bried nevez, e komzas d'ezo diwar-benn ar briedelez, deveriou ar priedou kristen, hag ec'h echuas evelhen : « Ra blijo gant Doue ho penniga, rei d'eoc'h eleiz a vugale. C'houi o savo evel m'eo dleet, a roio d'ezo skoueriou ha kenteliou mat, evel m' hoc'h eus bet hoc'h-unan digant ho kerent, ha ma plij gant Doue dibaba en o zouez unan bennak evitan, c'houi hen roio laouen. Eus ho familhou bete-vreman meur a veleg a zo deuet. Ra gendalc'hint da zont. Ar wella aluzen a c'heller ober hirio d'an Iliz, eo rei d'ezi beleien. Bezit dinec'h, Doue ho tigollo, rak e vennoz a gouezo war ho ti. »

An oferenn a voe lavaret da-c'houde, hag e-pad an oferenn kantikou kaer a voe kanet, « Evit beva gant levenez, » ha re-all.

O respont d'an oferenn, e oa eur c'hloareg yaouank, nevez

graet abostoler, breur d'ar plac'h-nevez. Bloaz en doa c'hoaz da c'hedal a-raok beza beleget.

Hiniennou, en iliz, a lavare enno o-unan : « Ar c'hloareg-se, ma karfe beza chomet ganeomp, a vije bet eürus, rak pinvidik eo, ha n'en devije bet diouer eus netra. »

Met re-all ivez a sonje dishenvel : « Hennez, emezo, eo en deus kemeret al lodenn wella, rak n'eus netra ken kaer ha labourat evit gounit eneo da Zoue. »

Sakramant ar briedelez a zo eur Sakramant bras. Dreizan eo e teu bugale nevez d'an Iliz, hag abalamour da-se an Iliz a ra enor d'ar priedjou nevez.

Sakramant an Urz ivez a zo eur Sakramant bras. Kement a ezomm a zo eus an eil hag egile eus ar sakramanchou-se.

Merc'h an tenzorier, o timezi, a rae mat. Seul-vui a familhou kristen a vezo en eur barrez, seul-welloc'h e vezo. Sevel eur familh gristen nevez a zo labourat evit Doue, evit an Iliz.

He breur, an abostoler yaouank, a save uheloc'h evelato. Dilezel madou ha plijadureziou ar bed evit beza muioc'h da Zoue, gellout ober muioc'h a vad d'ar re-all, petra ken kaer ?

Ra gendalc'ho en hor bro Vreiz gouenn ar familhou kristen. Ra gendalc'ho an tiez da veza leun a vugale. N'eo ket unan, daou, met pemp, c'houec'h hag ouspenn, kement ha ma plijo gant Doue rei d'ar priedjou. Er familhou a zo enno eleiz a vugale, eno eo e vezo kavet danvez beleien, danvez leanezed.

Pa ne vez nemet unan pe zaou a vugale, e vezont moumonnet e pep giz, ha n'eus netra da c'hedal eus o ferz. O c'herent a ra gwella ma c'hellont evit miret n'en em rofent da Zoue. Ne sonjont nemet enno o-unan, n'int ket gouest d'en em ankounac'haat evit klask mad ar re-all.

Met da zeiz ar varn o deus da zivall na vijent kavet re skanv gant an Aotrou Doue.

J. U.



Dublin ha Santez-Anna Wened...

Bretoned Breiz ha Bretoned Iwerzon (Irlande) a zo o paouez rei d'ar bed holl eun testeni nevez eus o feiz.

E Dublin, kêrbenn Iwerzon, ez eus bet graet eur gouel



An Ao. Duparc, eskob Kemper ha Leon, a reas eur brezegenn gaer e Santez-Anna-Wened d'ar 24 a viz Gouere.

dispar en enor da Sakramant an Aoter. E Santez-Anna-Wened, ez eus bet eur gouel en enor d'an 240.000 Breizad marvet er brezel.

— IWERZON, bet gwasket, dismantret ha merzeriet, e-pad 400 vloaz, gant Protestanted Bro-Saoz, a zo breman libr. N'eus mui nemet eun neudennig o staga anezi ouz ar Saozon.

He bugale a zo chomet holl fidel d'an Iliz katolik. Ar Presidant hag ar Vinistred a zo kristenien eus an dibab. Int eo a oa er penn kenta e goueliou Dublin. An dud a renk izel, labourerien, micherourien, a oa helebini ganto evit kempenn ar gouel. Dre an entent e oa etre an holl, ez eas an traou ken mat en-dro ma lavare an holl birc'hirined e oa aet ar maout gant pobl Iwerzon.

Sonjit eta : 10 Kardinal, 160 Arc'heskob hag Eskob, hag ouspenn eur milion a dud !! Biskoaz ne voe bet ken enoret, ken meulet Hor Salver Jezuz-Krist en e Sakramant meulet ra vezo !

— E SANTEZ-ANNA-WENED, d'ar 24 a viz Gouere, gouel dispar ivez evit benniga bez-meur soudarded Breiz roet ganto o buhez evit ar vro. Kannad an Tad santel ar Pab, evel e Dublin, 15 Arc'heskob hag Eskob, 4 Abad, 120.000 ha marteze 150.000 a dud. E-tal ar bez, 800 banniel soudarded, hag er penn uhela, Amiraled, Jeneraled, ha Kannaded katolik Breiz. E Dublin, e oa e-leiz a estranjourien ; e Santez-Anna, ne oa nemet Bretoned. Pedet e voe kalz evit ar soudarded maro. Meulet e voe o nerz-kalon hag o feiz, ha goulennet gant an holl en em staga muioc'h-mui ouz Doue hag ouz ar vro.

An Aotrou Duparc, Eskob Kemper ha Leon, hag an Aotrou Serrand, Eskob Sant-Brieg ha Landreger, en o frezegennou, o gavas an tu da douch an holl galonou. Diou ganaouenn, unan e galleg, hag eun all e brezoneg, houman savet gant Taldir, a zegasas sonj d'ar re veo eus poaniou ha merzerenti ar re kouezet war an dachenn hag eus an dever o deus da bedi evito ha da chom unanet ganto.

Ha petra lavarout eus an traou ker, garlanteziou, taolen-nou, bannielou, bolzou-enor, kempennet e ruiou kêr gant tud Keranna ? Eun dudi e oa o gwelout.

N'eus ket par d'ar Vretoned, p'en em glevont, da sevel goueliou evit enori Doue hag evit enori ar vro !



Kenteliou an Aviel

XXX^e PREZEGENN

RESPONT JEZUZ D'EUN DOKTOR EUS AL LEZENN.
E-KREIZ EUR BARR-AMZER WAR LENN
JENEZARED.

Va breudeur ker,

Antronoz an dervez m'en doa pareet kement a dud klanv pe dalc'het gant an diaoul, Jezuz a yeas mintin-mat d'eul lec'h distro evit pedi. Simon Per hag an diskibien all a yeas di d'e gaout hag a lavaras d'ezan : « Mestr, eur bern tud a zo o klask ac'hanoc'h. Deuit eta en-dro da Gafarnaom, » — « Deomp kentoc'h, a respont Jezuz, d'ar c'heriou tro-war-dro ; rak ret eo d'in ivez mont d'ar c'heriou-se, evit-se eo ez oun deut. »

Hag ez eas dre ar Galile a-bez, en eur brezeg e kement Sinagog a gave war e hent. A bep tu e veze digaset d'ezan tud dalc'het gant klenvejou a bep seurt, ha Jezuz a faree holl en eur sevel e zorn us o fennou.

Eun dervez, eur skrib, eun den gouiziek, a dosta outan : « Mestr, emezan, me ho heuilho n'eus forz da belec'h ez eoc'h ! » Jezuz a respont : « Al lern o deus o douarennou hag al laboused o neizou, met Mab an den ne oar e-pelec'h lakat e benn da ziskuiza. »

— « Mestr, eme eun all, lezit ac'hanoun da genta da vont da sebelia va zad. » Ha Jezuz a respont da hennez : « Deus d'am heul ha lez an dud varo da sebelia an dud varo ; evi-dout-te, kea da brezeg an Aviel. »

— « Mestr, me ho heulio, eme eun trede, met roit d'in

amzer da lakat urz em ziegez. » — « An neb, eme Jezuz, a sell a-drenv goude beza lakaet e zorn en alar, n'eo ket mat evit rouantelez Doue. »

Petra felle da Jezuz lavaret o komz evel-se ? C'hoant en doa da rei da gompren penaos, evit beza e wir ziskibl, ez eoret beza henvel outan, beza paour eveltan ha beza eveltan distag mat diouz an danvez ha diouz holl aezamanchou ar bed.

Gwir ziskibien ez int da Jezuz, ar re a weler o kuitaat o c'herent hag o bro evit en em westla da Zoue er stad a baourentez, a verc'hted hag a sentidigez. Trei a reont kein da enoriou, danvez, plijaduriou ar bed. N'o deus mui ken soursi nemet kerzout war roudou Jezuz-Krist, beza paour eveltan, ober pinijenn eveltan, klask eveltan gloar an Aotrou Doue ha silvidigez an eneou, netra ken. Ma c'houlennit diganin da betra e servich ar seurt tud se, me 'responto d'eoc'h : da betra e servichont ? Met da zistana kounnar an Aotrou Doue dre o fedennou hag o finijennou ; da veza-war-dro an dud klanv pe varc'hagnet en ospitaliou, da vont d'ar broiou estren evit konvertisa ar baganed ; setu da betra e servichont. N'eus, e gwirionez, stad ebet uheloc'h. Eürus ar re a zo galvet gant Doue hag eürus ar re a zo kalonek a-walc'h evit senti ouz mouez an Aotrou Doue o galv d'eur vuhez ken parfet.

C'houi, V. B. K. n'oc'h ket galvet, al lodenn vrasa ac'hannoc'h, d'ar stad-se. Met istimit hag enorit evel m'eo dleet, ar re anezo a gavit war ho hent. Bepred ar bed a zo en em savet enep ar re a fell d'ezo en em ouestla da Zoue, dre ma 'z int, e-touez an dud, gwir skeudennou hor Salver J. K., ha setu perak e vez graet brezel d'ezo. Ankouat a reer ar vad a reont ; gant gevier, goaperez, pep seurt komzou divalo, e vez paet o holl oberou mat ; ha memes, evel ma 'z eus bet gwelet e Franz, n'eus ket c'hoaz gwall-bell-zo, o c'has a reer kuit eus o c'houchou, eus ar skoliou, eus an ospitaliou. Hag an dra-se, dre ma 'z int gwir ziskibien d'hor Salver ; ober a reer d'ezo evel da Jezuz, o mestr.

Dleet eo d'eoc'h-c'houi ivez, V. B. K., pegwir ez oc'h badezet, beza gwir ziskibien da Jezuz-Krist, kement ha ma c'hellit hervez ho stad. Ma ne c'houlenn ket Jezuz diga-

neoc'h-c'houi kuitaat ho tud, ho pro, ho tanvez, hag ober kement a bedennou hag a binijennou hag ar venec'h hag al leanezed, Hen a c'houlenn diganeoc'h mirout e c'hourc'hennou : rak den ne vo salvet, ma ne gar ket Doue dreist pep tra, ha n'eus nemet ar re a vir mat lezenn Doue hag a ziskouez d'ezan ar garantez-se.

Eun dervez bennak e oa Jezuz e-kichen lenn Jenezared, hag ar bobl a oa bepred war e lerc'h evit klevet e brezegennoù, a deue kement warnan ma oa ret d'ezan pignat en eur vag ha lavaret d'e ziskibien : « Deomp en tu all d'al lenn. » E-pad ma oant war vor, setu, en eun taol, savet eur gaouad amzer fall : yudal a rae an avel, lammat a rae an tarsiou mor, strinka a rae an dour er vag ken a venne goueledi, Jezuz, koulskoude, a oa kousket. An diskibien, spontet, a zihun anezan en eur youc'hal a bouez-penn : « Mestr, save-teit ac'hanomp, emamp o vont da goll. » Jezuz a respont d'ezo : « Perak hoc'h eus-c'houi aon, tud a nebeut a feiz ? » Neuze e sav hag e kemenn d'an avel ha d'ar mor... Kerkent e tavont hag e teu an amzer vras. An holl dud a oa gantan, a lavar etrezo : « Piou eo heman, ma sent ar mor hag an avel outan ? »

Piou eo ? Met Doue sur a-walc'h, rak n'eus nemet Doue, krouer an Nenv hag an douar, hag a c'hell beza mestr evel-se war an avel ha war ar mor e kounnar. Ar mirakl-se, V. B. K., a zeskl d'eomp c'hoaz eun dra all. Ar vag en em gave Jezuz enni gant e ziskibien, a zo skeudenn an Iliz santel katolik. Jezuz a zo bepred gant e Iliz, pegwir ez eo ar penn anezi, daoust n'e veler mui gant an daoulagad, abaoe m'eo pignet d'an Nenv. Simon-Per hag an diskibien all a oa gantan er vag, a zo skeudenn hon Tad Santel ar Pab hag an Eskibien, an holl dud o deus da ren an Iliz. Evel bag Simon hejet gant an arne ha gwagou ar mor, an Iliz a vez alies gwall-gaset gant an dud fall a sav en he enep. Ha ken krenv eo ar brezel graet d'ezi ma vefe kredet a-wechou ez a da goll. Met nann, rak Jezuz a zo atao ganti. A-wechou e seblant e vefe dilezet an Iliz gantan, ken bras ma 'z eo an danjer : kousket eo Jezuz evit doare. Bepred, koulskoude, Jezuz a zihun, Jezuz a sav hag a c'hourc'henn d'an avel ha d'ar mor, da lavaret eo, d'an diaoul ha d'e vevelien, en eur gas da

netra o holl ardou : ha neuze e c'hell an Iliz labourat adarre e peoc'h da savetei an eneoù. Evel-se eo bet an traou e amzer genta an Iliz hag evel-se e vezint betek fin ar bed. Setu perak ne dleomp ket holl kalon n'eus forz pegen kriz ez eo ar brezel graet d'hor Mamm Santel an Iliz ; e-lec'h fallgaloni, dihunomp kentoch Jezuz dre hor pedennou leun a feiz hag Hen a savo da zifenn e Iliz.

Ar vag-se, V. B. K., a zo ivez skeudenn ene an den hag a vez alies hejet gant an tentasionou. Kaer en devezo an diaoul pe skoueriu fall ar bed pe techou fall ho kalon klask ober evit ho tistrei diwar an hent mat hag ho tougen d'ar pec'hed, ma hoc'h eus ar soursi da c'hervel Jezuz ha d'e bedi d'ho sikour, ne gouezoc'h ket er pec'hed.

Hoc'h-unan kaer, dinerz evel ma 'z oc'h, ne deufec'h ket a-benn da drec'hi an dentasion. Met ma vez Jezuz ganeoc'h — hag atao e vezo ganeoc'h, ma pedit anezan — c'houi a vo krenvoc'h eget an diaoul hag ar bed, pegwir ho po nerz an Aotrou Doue.

Tadou ha mammou,

c'houi a zo karget eus ho pugale.

Rak-se...

Tri dra

hoc' eus atao da c'houzout diwar o fenn :

1° E-PELEC'H EMAINT.

2° GANT PIOUS EMAINT.

PETRA 'REONT.

Pour sanctifier le mois de Septembre

1° — Vivons toujours dans l'état de grâce.

2° — Faisons la Sainte Communion le premier Vendredi du mois (le 2) ou le Dimanche suivant ; le jour de la fête de la Nativité de la Sainte Vierge (le 8) ; et toutes les fois que nous le pourrons.

3° — Assistons à la Sainte Messe tous les dimanches ...plus souvent si nous le pouvons... et toujours avec un livre de messe.

4° — Observons avec soin la loi de l'abstinence tous les vendredis, la loi du jeûne et de l'abstinence les jours des Quatre-Temps (21, 23 et 24 Septembre).

5° — Offrons à Dieu nos actions tous les matins, et faisons tous les soirs la lecture du Saint Evangile ou de la Vie des Saints suivie de la prière en commun.

6° — Aimons notre prochain de tout notre cœur, et rendons-lui service toutes les fois que nous le pourrons.

INTENTION GÉNÉRALE DU MOIS : L'amour de la Croix.

INTENTION MISSIONNAIRE : L'action catholique dans les missions.

OFFRANDE QUOTIDIENNE : Divin Cœur de Jésus, je vous offre, par le Cœur Immaculé de Marie, les prières, les œuvres et les souffrances de cette journée, en réparation de nos offenses et à toutes les intentions pour lesquelles vous vous immolez continuellement sur l'autel — Je vous les offre, en particulier, pour le succès de l'action catholique dans les missions.

« Si vous ne mangez ma chair, ... vous n'aurez pas la vie en vous.

« L'homme ne vit pas seulement de pain, mais de toute parole qui sort de la bouche de Dieu.

« Aimez-vous les uns les autres, comme je vous ai aimés. »

Notre-Seigneur Jésus-Christ.

L'esprit paroissial

L'on dit, avec éloges, de quelqu'un qui se montre affectionné à l'égard des membres de sa parenté et dévoué à leurs intérêts, qu'il a l'esprit de famille. De même nous devons dire de celui qui témoigne de la sympathie et du dévouement pour les personnes et pour les intérêts de la paroisse, qu'il a l'esprit paroissial.

Cet esprit paroissial se manifeste surtout à l'égard de trois éléments principaux qui constituent la paroisse, la famille paroissiale, composée de M. le Curé ou de M. le Recteur qui en est chef et le père, et les fidèles qui en sont les membres ou les enfants, puis l'église paroissiale où la famille se réunit et les œuvres paroissiales qui assurent sa conservation et son développement.

Or, on manifeste son attachement et son dévouement :

1° Au clergé de sa paroisse par le respect, la sympathie et le concours qu'on se fait un devoir de lui accorder en toutes circonstances... Ainsi, on entretient de cordiales relations avec ses prêtres; on les défend contre les injustes critiques; on favorise leurs entreprises de zèle; on suit docilement la direction religieuse qu'ils impriment.

2° A l'église de sa paroisse, par la fidélité à la fréquenter, préférentiellement à toute autre église ou chapelle, et à y accomplir ses devoirs essentiels et même ses dévotions particulières; par des générosités pour subvenir à son entretien; par la docilité à prendre part au chant et à la tenue liturgiques, durant les saints offices;

3° Aux œuvres de sa paroisse en s'enrôlant dans les associations de piété et de zèle qui y sont établies en faveur de chaque catégorie de la famille paroissiale; en soutenant de ses libéralités les œuvres catholiques.

Ceux qui ont à cœur de se montrer animés du véritable esprit paroissial font généreusement les petits sacrifices de vues personnelles, de susceptibilités, d'amour-propre, qu'impose parfois la collaboration aux œuvres paroissiales.

Ils s'efforcent, par leur exemple d'abord, mais aussi par de sages réflexions, de faire comprendre dans leur famille et leur entourage, la vraie notion, l'importance et la pratique de l'esprit paroissial.

Développer l'esprit paroissial, c'est développer le véritable esprit chrétien dans la paroisse.



ÇA & LA

LA GRANDE JOURNÉE DE SAINTE ANNE D'AURAY (24 Juillet)

Le 2 Août 1914..., il y a déjà 18 ans !... les soldats bretons, appelés par la mobilisation à participer à la plus terrible des guerres, traversaient la terre d'Auray, et, instinctivement, le cœur étreint par l'émotion, ils tournaient leurs regards vers la Bonne Mère Sainte Anne.

Hélas ! beaucoup ne sont pas revenus ; 240.000 d'entre eux ont versé leur sang pour la patrie ; et ce sont eux, c'est leur immense sacrifice que la Bretagne catholique a voulu honorer, le 24 Juillet, par l'inauguration d'un splendide monument.

Et elle a bien fait les choses... Elle les a faites d'une manière digne de ses 240.000 morts ! La présidence de Mgr Maglione, nonce apostolique... la présence des plus hautes autorités religieuses, civiles et militaires... l'armée et la marine représentée par les drapeaux des régiments dissous... une foule immense, composée surtout d'Anciens Combattants, tout contribua à faire de cette inauguration une fête telle que Sainte Anne n'en avait jamais vu de pareille.

Mgr Mignen, archevêque de Rennes, célébra la messe pontificale, durant laquelle Mgr Duparc, évêque de Quimper, prononça une allocution ; en des termes qui remuèrent les cœurs, il évoqua les morts de la grande guerre et supplia les vivants de ne pas les oublier : « J'ai lu, dit-il, dans les catacombes romaines cette inscription : que ceux qui viennent ici, prient Dieu. Cette inscription donne le sens du monument que nous inaugurons aujourd'hui... N'oubliez jamais les exploits de nos morts, ils nous ont révélé l'âme de la race ; n'oubliez jamais les sacrifices qu'ils ont faits pour nous... le Maréchal Foch a dit : seuls se perdent les peuples qui ont perdu le souvenir... la Bretagne ne perdra jamais le souvenir de ses enfants. »

A 2 h. de l'après-midi commença le défilé des drapeaux des Anciens Combattants, et ce fut devant ces témoins des grandes luttes que Mgr Serrand prit la parole avec cette ardeur tout apostolique de l'ancien aumônier d'Ypres : « Si nous avons élevé un tel monu-

ment, s'écrie-t-il, c'est que nulle province n'eut ses flancs blessés comme la Bretagne... Ici, à Sainte Anne, la veillée continuera. Quand les anciens ne seront plus là, les nouvelles générations maintiendront la piété du souvenir. »

La cérémonie se clôtura par la bénédiction du Saint-Sacrement et une absoute qui unit dans une même prière pour les morts tous les survivants de la grande guerre.

« JE SUIS CROISÉ, MADAME MA SŒUR ! »

5 heures du soir ! Le refuge où l'on prépare la soupe populaire s'anime, la distribution devant commencer peu de temps après.

Installation de fortune... tables grossières... murs décrépis de vieille salle d'œuvres... lumière électrique pleurante et rare que distribuent des lampes noircies par un trop long service !...

Une Sœur de Saint-Vincent de Paul dirige la manœuvre. Des dames et jeunes filles de bonne volonté constituent le personnel.

Soudain, bravant les consignes, entre un bambin... neuf ans... des yeux rayonnant de simplicité et d'assurance.

— Madame ma Sœur, c'est bien là que viennent les messieurs qui ont faim, parce qu'ils ne peuvent plus gagner d'argent ?

— Oui, mon petit.

— Alors, prenez.

Il tend son cartable, puis un paquet fait d'une blouse d'écolier. On ouvre le tout. Voilà que s'échappent des morceaux de pain, du chocolat, des figues, des gros sous, des bonbons, des gâteaux.

— Qu'est-ce que cela ?

— C'est nos goûters pour les messieurs.

— Mais qui vous a dit... ?

— Dimanche, à la messe, M. l'abbé a dit, comme ça, qu'il faut se priver pour ceux qui ont faim. On en a causé avec André. Il a demandé : si on donnait nos goûters ? Alors, il y en a huit qui ont donné leur goûter, hier, et onze aujourd'hui... et ils m'ont dit de l'apporter.

— C'est très bien, sais-tu, de se priver ainsi pour les chômeurs.

— Je suis Croisé, Madame ma Sœur, et ça compte, vous savez, les sacrifices... pour le petit Jésus.

Dans un magnifique « au revoir », l'enfant s'en est allé.

JUSTICE ET PARDON

Le gouvernement se prépare à déposer une proposition de large amnistie.

Là-dessus, Nicolas Lerouge, dans la *République*, ne se sent pas de joie, et, sur le mode lyrique, il s'écrie :

« Quand on parle d'amnistie en France, il y a de l'écho à gauche.

« L'amnistie, c'est la République commisévatrice. Un sourire d'in-

dulgence et mélancolique bonté éclaire son grave visage. Elle n'excuse pas les fautes auxquelles elle apporte l'oubli, mais elle ouvre à des égarés, pour redresser leur vie et remanier leur destin, les portes de la cité française. »

Le coup d'éponge sur le vice, la laideur, le crime ; le pardon à l'égaré, à la chute, à la faute ; la commisévatrice jusqu'à l'excès et l'imprudence, soit. Mais, tout de même, n'est-il pas une tâche plus urgente à remplir ? Avant de les ouvrir toutes grandes aux condamnés et aux coupables de droit commun, ne faut-il pas au préalable ouvrir les portes de la cité française à ceux-là à qui on ne peut reprocher que leur dévouement et leur esprit de sacrifice, et que l'on a exilés, parce qu'ils avaient fait le vœu, par amour de leur Dieu, de se consacrer tout entiers au service du prochain ?

Avant la commisévatrice pour le coupable, il y a la justice pour l'innocent, l'amnistie ne se justifie pas devant le maintien des lois d'expulsion et d'ostracisme de 1901 et de 1904 contre les Religieux français. La « République du cœur » ne peut devenir une réalité que si l'on fait cesser la République de la haine.

Espérons qu'au jour de la discussion devant les Chambres, une voix s'élèvera pour faire entendre cette vérité de bon sens : C'est faire preuve d'hypocrisie que de se flatter d'être bon, quand on se refuse d'être juste.

A MÉDITER

Après l'assassinat de M. Doumer, le ministère démissionnaire a tenu une grande conférence à la présidence du Conseil dans le but d'assurer de façon plus efficace la sécurité du Président de la République. Voilà qui est digne d'éloges, encore que tardif.

Or, parmi les mesures envisagées, on a adopté le contrôle du droit d'association accordé aux étrangers. Et ceci laisse rêveur.

Alors, les métèques, les indésirables, de toutes couleurs, de tous pays, peuvent librement se réunir en France, et, à l'ombre de leurs associations, préméditer à leur aise leurs mauvais coups ? Oui, c'est la loi !

Mais les Religieux Français, même Anciens Combattants, n'ont pas le droit de se réunir pour prier, enseigner, se dévouer ? — Non, c'est la loi ! — Tout de même !!

LA DRAC ET LA PAC DEVANT L'OPINION

Le mois dernier, à Toulon, la DRAC et la PAC du département du Var, tenaient leur assemblée annuelle. On se demande parfois dans certains milieux quelle est l'utilité de ces manifestations, et l'action exercée sur l'opinion publique par les Religieux et les Prêtres Anciens Combattants. L'appréciation suivante, extraite du

Petit-Var, journal radical par excellence, suffira pour édifier et rassurer les hésitants ou les grincheux :

« Un congrès d'Anciens Combattants de plus, dira-t-on. Oui, mais un congrès assez particulier, qui loin de demander privilèges et avantages, d'ailleurs légitimes, borne son dessein à revendiquer l'humble, la simple égalité des droits. Selon la forte expression d'un Prêtre amputé : « Ceux qui sont venus de très loin, répondant à l'appel du pays, pour se faire casser la gueule, voudraient bien vivre sur la terre qu'ils ont défendue et rougie de leur sang. » On a contesté, paraît-il, ce droit : et c'est une ombre sur une victoire qui fut belle, noble et méritée.

« Au reste, la question est réglée pour les Anciens Combattants de tous les partis, qui se refusent à classer les Français selon la coupe de leurs habits et à mesurer la liberté à l'état exercé par l'ancien poilu, repris par la vie.

« C'est du moins l'impression qui se dégage de cette journée, belle par l'union émouvante et profonde des Anciens Combattants venus de tous les horizons politiques, belle surtout par la noblesse des pensées, l'élévation des idées et la communion des âmes, par delà les principes et les philosophies, dans un même idéal de fraternité. »

N'est-ce donc rien qu'un pareil témoignage d'un ardent mais loyal adversaire ?

LE DOYEN DES EVÊQUES

C'est son Excellence Mgr Redwood, archevêque de Wellington, en Nouvelle-Zélande ; il est âgé de 93 ans ; il fut sacré en 1874 et célébra en 1924, en présence de 22 prélats océaniques, ses noces d'or épiscopales.

On a reparlé de lui à l'occasion du Congrès Eucharistique de Dublin, auquel il a voulu prendre part, étant d'origine irlandaise.

« Mes petits enfants, aimez-vous les-uns les-autres, comme je vous ai aimés.

On reconnaît que vous êtes mes disciples à ce signe que vous vous aimez les-uns les-autres.

Ce que vous aurez fait au plus petit d'entre les miens, c'est à moi que vous l'aurez fait.

Vous êtes tous frères. »

N.-S. Jésus-Christ.



NOUVELLES DES MISSIONS

JE PUIS CHANTER LE MAGNIFICAT !

Les *Annales de Marie-Immaculée* publient la lettre suivante d'une religieuse, missionnaire en Océanie, à sa supérieure générale :

Ma Révérende Mère,

Vous avez une fille lépreuse. Avec cette terrible maladie, la mort me semble un gain. En attendant, j'accepte de tout mon cœur la volonté de Dieu ; je le remercie de me donner l'occasion de beaucoup souffrir, peut-être plus moralement que physiquement. Je m'abandonne à la Sainte Vierge, ma bonne Mère. Elle veut m'aider à me sanctifier par la douleur : que c'est une bonne chose pour moi ! Je puis chanter le Magnificat.

Ma seule peine est de quitter cette Mission que j'aime tant, mes deux compagnes si bonnes. C'est pour moi un gros sacrifice. Je l'offre à Dieu avec la perspective d'être bientôt défigurée, de voir mon corps pourrir et tomber en lambeaux. Deo gratias !

Jusqu'à ce que je sois cachée dans quelque coin, je vais avoir beaucoup d'humiliations à subir. On a demandé des prières, moi je ne désire rien que faire la volonté de Dieu. J'attends l'ordre de Monseigneur pour partir. Où irai-je ? Que c'est bon de s'abandonner à la Providence ! Je ne m'inquiète de rien. Quand vous apprendrez ma mort, ce sera le moment de chanter le Te Deum dans ma chère petite chapelle du noviciat. Votre reconnaissante et affectueuse petite lépreuse...

Lignes sublimes qui se passent de commentaires !

POURQUOI NOUS PLEURONS

A Léopoldville (Congo belge).

Un soir, sous la varangue du couvent, une voix appelle :

— Ma Zelo ! (Ma Sœur !)

— Qui va là ?

— Ma Zelo, yaka kutala, soko mwana wa bisu adjali kubela mingi. (Ma Sœur, venez voir, un de nos enfants est bien malade).

Deux noirs sont là, et, sous son pagne, la femme cache un petit

être frissonnant. A l'hôpital, on aura mieux à sa portée les secours nécessaires ; vite on y conduit le petit groupe. Il s'agit d'une mignonne petite d'un an à peine. Elle n'a plus qu'un soufle de vie.

— Est-elle baptisée ? interroge la Sœur.

— *Sango apesi yeye Batisimu sasepi.* (Le Père l'a baptisée maintenant.)

Quelques minutes plus tard, l'angelet noir prenait l'envol vers le ciel.

Le lendemain matin, reprenant leur service à l'hôpital des noirs, les Sœurs retrouvent les deux indigènes faisant tristement la garde près de la petite morte.

Toujours, pour consoler, la charité a des mots d'espérance...

— Ne pleurez pas !... Votre enfant est au ciel, avec les anges, et si heureuse !...

— *O ma Zelo, tokolela Emilia te, kasi tokolela mwana mosusu akufi mopaganu !* (O ma Sœur, nous ne pleurons pas Emilia, mais un autre enfant mort païen.)

Il y a quinze jours à peine, ces noirs avaient perdu un bébé, si vite emporté par la fièvre, qu'ils n'avaient pas eu le temps d'appeler le missionnaire. L'éternel bonheur de cette âme, voilà ce que ces parents noirs pleuraient près du corps glacé de la petite chrétienne.

(Annales des Franciscaines Missionnaires de Marie.)

LETTRE DE LA MISSION DU SACRÉ-CŒUR. (Rajputana, Indes)

Révérénd et bien cher Père,

Il y a déjà quelque temps que je désire vous remercier pour l'envoi de votre revue et aussi vous féliciter pour l'intérêt que vous savez lui donner.

Savez-vous que notre Bretagne est assez bien représentée dans notre Mission du Rajputana ?

En effet, des 48 missionnaires qui s'y dévouent. — 1 Evêque, 37 prêtres, 10 frères laïcs, — 15 sont bretons.


Le diocèse de Vannes à lui seul en réclame 5 : Notre Evêque, Mgr Pie Le Ruyet, de Lorient ; Le Supérieur Régulier, T. R. P. Armand, de Vannes ; Notre grand Missionnaire, R. P. Charles, de Plœmeur ; Un ancien gardien de Lorient, R. P. Eliacien, de Guiliers ; Un Frère laïc, T. H. F. Vèran, de Locminé.

Le diocèse de Saint-Brieuc, lui, en réclame 4 : Le Supérieur du grand Séminaire : R. P. Hippolyte, de Lézardrieux ; Le Chapelain de Ratlam : R. P. Sylvain, de Trézény ; Le Maître des Novices à Mangalore : R. P. Guy, de Pontrieux ; Notre infatigable baptiseur : T. H. F. Hilarion, de Plouberz.

Le diocèse de Nantes n'en réclame que 3 : Le Curé de la Cathédrale : R. P. Lucien, de Nantes ; Un des Missionnaires de Jhabua : R. P. Clodoald, d'Héric ; Un Frère laïc : T. H. F. Philibert, de Bouguenais.

Le diocèse de Rennes en réclame 3, lui aussi : Le Chapelain

d'Indore : R. P. Francois Régis, de Le-Lescouët-sur-Meu ; Le Vicaire de Thandla : R. P. Sébastien, de Luitré ; Un Frère laïc : T. H. F. Ernest, d'Argentré.



Un missionnaire et des chrétiens nouvellement convertis.

Il n'y a que Quimper qui ne soit plus représenté dans la Mission. le R. P. Ollivier de Morlaix venant de la quitter pour raison de santé.

Parmi les 20 Missionnaires qui, jusqu'ici sont morts dans la Mission en activité de service, on compte le R.P. Baudoin d'Héric (Nantes) ; Le R. P. Louis-Antoine, de Nantes ; Le R. P. Raoul, d'Argentré (Rennes). Vous le voyez, la Bretagne a tout de même une grande part dans l'évangélisation de cette immense Mission du Rajputana, et il serait peut-être bon que vos lecteurs le sachent, afin qu'ils prient spécialement pour nous, dirigent vers nous de solides vocations et ne nous oublient pas dans la distribution de leurs aumônes.

Rome trouvant que nous avons suffisamment travaillé dans le Sud de la Mission (Central India), nous l'enlève pour le donner aux Frères du Verbe Divin et nous permettre ainsi de travailler à l'avènement du règne de Notre-Seigneur dans des districts du Rajputana que, faute de missionnaires, nous n'avions pu évangéliser jusqu'ici. — Le travail va être rude, très rude même, vu la mentalité actuelle des indiens et de leurs chefs politiques. — Mais, aidés des prières et des secours de nos Amis et bienfaiteurs de France... et de Bretagne, rien ne nous arrêtera dans cette course à l'assaut des tranchées du démon et de ses suppôts.

Vous nous recommanderez, n'est-ce pas, cher Père, aux prières et à la charité des lecteurs de votre revue. Merci à l'avance !

F. ARMAND de Vannes, O.M.C.,
Sup. rég. et comm. prov.

**COURS D'INITIATION MEDICALE
AUX MISSIONNAIRES
A L'UNIVERSITE CATHOLIQUE DE LILLE.**

LILLE (France). — La Faculté de Médecine de l'Université Catholique de Lille organisera, pour la septième fois, pendant ces vacances, à l'usage des missionnaires et de leurs collaborateurs, des cours d'Initiative Médicale. Cet enseignement sommaire et pratique permet aux missionnaires de s'assurer les connaissances indispensables pour les soins de leur propre santé et celle de leurs confrères dans les pays dépourvus de médecins où ils devront séjourner. En outre, il leur permet d'exercer auprès des indigènes la pratique sommaire de l'art médical. Les religieuses et les autres collaborateurs des missionnaires feront à Lille une expérience déjà suffisante pour leur permettre de tenir un dispensaire.

Les cours et cliniques à l'usage des missionnaires commenceront le 2 Septembre et se termineront le 15 Octobre 1932. Un diplôme de Formation Médicale sera délivré aux missionnaires qui auront suivi ces cours et exercices pratiques de médecine pendant toute leur durée et auront subi les interrogations et épreuves requises. Ce diplôme, reconnu par divers gouvernements, a permis à plusieurs diplômés d'obtenir des concours officiels pour leurs dispensaires.



La vie chrétienne par le Tiers-Ordre

Le Tiers-Ordre & le Travail

Dieu nous a imposé la loi du travail, lorsqu'il a dit à Adam au Paradis terrestre : « Le sol est maudit à cause de toi. C'est par un travail pénible que tu en tireras ta nourriture, tous les jours de ta vie..... C'est à la sueur de ton visage que tu mangeras du pain.... »

Accepter généreusement la condition dans laquelle Dieu nous a mis, y gagner, avec le ciel, le pain de chaque jour, c'est la plus excellente manière de faire la volonté divine, et, par là même, de travailler à sa sanctification personnelle.

Sans doute Notre Seigneur Jésus-Christ a dit : « Travaillez pour gagner, non seulement la nourriture qui périt, mais surtout celle qui demeure pour l'éternelle vie que le Fils de l'Homme vous donnera. »

Il a dit encore : « Cherchez d'abord le Royaume de Dieu et sa justice..... », mais il nous fait aussi demander dans le Pater notre pain quotidien, le pain de l'âme et celui du corps, que l'on se procure normalement par le travail.

Nous lisons dans la Sainte Ecriture ces paroles d'un prophète : « Le travail de vos mains vous procurera la nourriture, le bonheur et toutes sortes de bénédictions » et saint Paul ajoute avec une franchise toute apostolique : « Que celui qui ne veut pas travailler, ne mange pas. »

Notre Seigneur ne nous a-t-il pas donné l'exemple de la sanctification par le travail ? Il a donné, a-t-on dit, trois heures à la croix, trois ans à la prédication de l'Evangile, mais il a consacré une vingtaine d'années au travail manuel dans l'atelier de Nazareth.

Saint François écrivait dans sa première Règle : « Que les

Frères qui savent travailler, travaillent, et qu'ils s'appliquent au travail qu'ils ont appris, pourvu qu'il ne soit pas contraire au salut de leur âme, et que l'on puisse l'exercer d'une manière honnête. »

Une des raisons pour lesquelles il a tant aimé la Pauvreté, ne serait-elle pas l'obligation où elle met de se livrer à une vie de travail ? Il avait en effet en horreur la Pauvreté paresseuse. Il l'a bien fait voir le jour où il chassa du couvent un de ses frères, avec ces paroles d'une sévérité qui étonne de sa part : « Va ton chemin, Frère mouche, tu consentirais à manger le travail de tes Frères et à faire le paresseux dans les œuvres de Dieu. Tu n'es qu'un frelon, abeille paresseuse et stérile, qui ne travaille pas et ne produit rien, et ne sait que manger le travail et le fruit des bonnes abeilles. »

Certains tertiaires, peut-être, pourraient faire leur examen de conscience sur ce point. Je parle surtout de nos Sœurs du Tiers-Ordre qui n'ont pas d'occupations spéciales, qui n'ont qu'à veiller au soin de leur ménage. Que de temps perdu en visites inutiles, où la charité n'est pas toujours sauvegardée : temps perdu en conversations oiseuses, occasions de critiques, de médisances ou de calomnies ! Que de temps consacré à des futilités, à des riens, alors qu'il est si précieux, le temps, qu'il nous est donné pour mériter le ciel par la fidélité à nos devoirs !

Et les autres tertiaires, qui ont leurs occupations en dehors de chez eux, sont-ils toujours consciencieux dans leur travail ? Ne font-ils jamais tort à leurs patrons, à leurs employeurs, par leur flânerie, leur perte de temps, ou même l'emploi de leur temps à des travaux personnels ?

Aimons le travail. Comme on l'a dit : « Saint François n'est pas seulement l'ami des agneaux, des alouettes, des fleurs des champs, en un mot, de toutes les créatures, mais il a animé de son esprit des millions d'intelligences, et ces millions d'intelligences, pendant des siècles, ont représenté le progrès et le mouvement dans le monde de la pensée. »

D'après Renan lui-même : « C'est ce mendiant qui a été le père de l'art chrétien. »

Quant au Tiers-Ordre, « il est dans sa nature de faire aimer les arts et les lettres, les beautés de la nature, de réhabiliter le travail et de l'ennoblir. »



Septembre 1932


Jours	FÊTES ET INTENTIONS	Indulgences
1 J	B. Bernard d'Offida, Cap. — Le détachement des biens de la terre	I. P.
2 V	B. Apollinaire Cap. M. — Le zèle	
3 S	Bx. Jean et Pierre 1 O. Mm. — Le don de force	I. P.
4 D	16 ^e après la Pentecôte. — Ste Rose 3 O. — La pureté	
5 L	B. Gentilis M. 1 O. — L'oubli de soi	
6 M	Bx Libérat, Timothée et Pérégrin, 1 O. — L'humilité	
7 M	De la Férie. — La pénitence	
8 J	NATIVITE de N.-D. — La dévotion à la T.S. Vierge	A.G.-I.P.
9 V	Bse Séraphine Vve 2 O. — L'esprit de sacrifice	
10 S	S. Nicolas de Tolentino. — La vertu de foi	
11 D	17 ^e après la Pentecôte. — La joie spirituelle	
12 L	S. Nom de Marie. — L'amour de Marie	
13 M	B. Franç. de Calderola 1 O. — L'amour de la solitude	
14 M	Inv. de la Ste Croix. — L'amour de la croix	
15 J	N.-D. des 7 Douleurs. — La constance dans les sacrifices	
16 V	B. Franç. de Camporosso Cap. — La charité envers le prochain	
17 S	Stigm. de S. Franç. — La dévotion à S. François d'Assise	A.G.-I.P.
18 D	18 ^e après la Pentecôte. — S. Jos. Cup. — Le don de piété	I. P.
19 L	S. Janvier et C. Mm. — La fidélité à nos exercices de piété	
20 M	S. Eustache et C. Mm. — L'attachement au S. Siège	
21 M	O.-T. S. Matthieu Apôtre. — La pénitence	
22 J	S. Thomas de Villanova Ev. — La dévotion à l'Eucharistie	
23 V	O.-T. S. Lin P. M. — La soumission dans les épreuves	
24 S	O.-T. S. Pacifique 1 O. — Le dévouement aux œuvres paroissiales	I. P.
25 D	19 ^e après la Pentecôte. — La dévotion aux 3 Ave Maria	
26 L	SS Cyprien et Justine Mm. — La dévotion aux anges gardiens	
27 M	S. Elzéar 3 O. — Le salut des pêcheurs	I. P.
28 M	B. Bern. de Feltre 1 O. — La dévo. à la Très Sainte Trinité	
29 J	S. MICHEL Archange. — Le règne de Dieu	I. P.
30 V	S. Jérôme Doct. — La fidélité à la lect. des Stes Ecritures	

EXPLICATIONS DES ABRÉVIATIONS

A. G. = Absolution générale avec indulgence plénière moyennant confession, communion et prières aux intentions du Pape. Elle peut être donnée : au confessionnal, après la confession, avec la petite formule abrégée et par tout confesseur, dès la veille de la fête au matin jusqu'à minuit du dernier des huit jours qui suivent ; publiquement, avec la grande formule, la veille de la fête à partir de midi, le jour de la fête, le dimanche dans l'octave.

I. P. = Indulgence plénière aux conditions ordinaires : confession, communion, visite d'une église et prières aux intentions du Pape. — La confession peut être faite huit jours avant la fête, le jour même, ou l'un des sept jours qui suivent ; la communion peut être faite, la veille de la fête, le jour même, ou l'un des sept jours qui suivent ; à défaut d'une église franciscaine ou de Fraternité, on peut visiter l'église paroissiale, les malades remplacent la visite par 5 Pater et Ave ; la prière doit comprendre au moins un Pater, Ave, Gloria Patri.

C. = confesseur ; D. = docteur ; E. = évêque ; M. = martyr ; P. = pape ; B. = bienheureux ; Bse = bienheureuse ; V. = vierge ; Vve. = veuve ; 1 O. = du premier ordre ; 2 O. = du deuxième ordre ; 3 O. = du troisième ordre (tertiaire).



Basilique de Notre-Dame des Trois « Ave Maria »

Les travaux pour la Crypte

Nous avons le bonheur d'annoncer que le roc a été rencontré pour ainsi dire à fleur de terre. Le terrain offre donc une base solide pour la Basilique. Deo gratias ! Mais il faut employer des machines spéciales pour enlever les blocs de craie ; il y aura environ 2.000 mètres cubes à extraire ! La crypte s'enfoncera dans le sol jusqu'à trois mètres de profondeur ! Le chantier est en pleine activité.

Permettez-nous, chers lecteurs, de vous présenter les maîtres de l'entreprise :

M. Charles-Henri Besnard, architecte en chef du Gouvernement, préposé aux Monuments historiques, expert près du Tribunal Civil de la Seine, déjà si avantageusement connu pour ses travaux d'art, et particulièrement pour l'église Saint-Christophe de Javel.

M. Tricon, directeur de la Société Parisienne des grands travaux en béton armé, dont la conscience professionnelle nous promet des matériaux de première valeur et l'exécution soignée des plans.

M. Audoin, chef de chantier, dont le tact et la fermeté révèlent un véritable don de commandement.

Nous n'oublions pas non plus les ouvriers dont plusieurs souffraient de la crise de chômage. Que! bonheur de pouvoir leur donner du travail qui leur permettra de gagner leur pain avec fierté. C'est à vous, chers souscripteurs, qu'ils doivent cette joie : soyez-en bénis !

Nos ressources, maintenant, vont s'écouler rapidement, et nous n'avons pas le tiers des capitaux voulus pour l'achèvement de la Basilique. Qu'importe ! Nous comptons sur Dieu, sur la Vierge, sur vous, chers lecteurs, et particulièrement, en ce moment, sur tous les amis de saint François d'Assise. Redoublez de générosité, faites des économies dans la mesure du possible pour l'amour de votre Maman du ciel ! Croyez-le bien : Elle ne se laissera jamais vaincre en générosité. Comptez sur Elle ; nous comptons sur vous.

F. Clovis de Provin.

Adresser toutes les offrandes à M. le Directeur du Propagateur des « 3 Ave Maria », Blois, Loir-et-cher. — C/c. 306.10 Paris.

L. Gérant : G. LE BAYON.

Imp. LE BAYON-ROGER & HENRIO - Lorient